

A SAINT IDUNET

Refrain

*Autrou Sant-Idunet
Truez enn han Doue
Pedit, pedit bepred
Evit ho pugale.*



I

Hor c'halon baour mantred
Gand kals a velkoni
Ni a zo daoulinet
Aman vit ho pedi.

II

Ni fel deomp chom bepred
Kalet en hor c'hreden
Ah ! n'hon delezit ket
Selaout hor peden.

III

Da Gastellin Guechall
C'houi zigasaz ar feiz
Daoust hag hirio tud all
Hén tolte meaz ouz Breiz

IV

Nann, nann rac' ho kalon
Morse n'heo bet sklaset
Nann Galloud hor patron
Morse ne vo berreet.

V

Evit gloar hoc'h hano
Roit deomp ho pennoz
A dalc'hit enn hor bro
Kreden hon tadou koz.

VI

C'hoant onn euz da veva
E skeud ho tiouaskel
Chom eb ho servicha
Mil guech kentoc'h mervel.